



KANTIKOU

PARREZ TREFFIAGAT

DALC'HOMP D'HOR FEIZ

DISKAN

*Da Feiz hon Tadou koz, ni Paotred Breiz-Izel,
Ni 'zalc'ho mat ato ;
'Vit Feiz hon tadou koz hag en-dro d'he banniel
Ni holl en em sturdo.
Feiz karet hon tadou, morse ni n'ho nac'ho,
Kentoc'h ni a varvo ! (3 gwech)*

D'ar c'hrouadur bihan, e kichenik e gavell,
E lakit eur vamm vat, en deiz evel en noz ;
Er boan hag en anken, huan hi a daol eur zell
War groaz santel Jezuz... he zonzj er baradoz.

D'ar paotr, d'ar plac'h yaouank, c'houi 'ziskouez hent
[ar furnez ;

C'houi 'lavar : « H gantan, hep krena dirak den.
Yaouankiz Breiz-Izel, bezit, epad ho puhez,
Ato gwir gristenfen, ha treitourien biken. »

D'an den koz gwen e benn, e korn an tan azezet,
O skuilh daclou a geuz war e amzer genta,
C'houi 'lar : « Bezit dinec'h, er baradoz 'yo kavet
Eurusted peurbadus goude poan ar bed-ma. »

D'an den diwar ar mêz, kerkouls ha d'an den a vor,
C'houi a ro nerz-kalon da stourm er boan ato.
Gouzout e reont en nenv e kavint holl dor zigor ;
Ar vuhez 'vo bet tenn ; d'an drubuilh kenavo ! !

KANTIK DA ZANT JAKEZ

I

Sant Jakez, abostol Jezuz,
Sant ken karet, ken galloudus,
Var tud a vor Lechiagat
Tro da galon ha da lagad.

DISKAN

*Meulomp a greiz kalon,
Sant Jakez hor patron.*

II

Gant Yann ha da dad Zebede
Epad an noz, a hed an de
War zao er vag, hep aon ebet
Warlerc'h pesked e peuz redet.

III

Pet gwech, gant dent an aveliour
Eo bet dismerret da weliou !
Pet gwech, ken huel ha da benn
Eo bet savet an tarziou gwenn !

IV

Pet gwech en deus an amzer fall
Da boulzet warzu ar bed all !
Ha klasket ar mor didruez
Lounka da vag ha da vuhez !

V

Met eun deiz ar Mestr o tremen
Dont war e lerc'h d'it a gemenn
Ha sentus d'ar galv a gleves
Te 'zibab eur vicher nevez.

VI

War mor ar youlou fall ha yud
Hep paouez e pesketes tud,
Hag ar Spagn da glevo eun deiz
O prezeg kelou mat ar Feiz.

VII

Ganit er Spagn achu da dro
D'an douar zantel te 'zistro
Dre grizder 'r roue Herodez
'Vit Doue 'roes da vuhez.

VIII

Kleo pedenn da vartoloded
En da japell brema bodet,
Ro d'eomp hirio, gant largentez,
Feiz e Doue ha karantez.

IX

E kreiz ar moriou dirollet
Mir na vo hor bagou kollet ;
Gant da zorn krenv peg yac'h er stur,
Ro d'eomp ato henchou asur.

X

E mesk tud goapus ha divez
En hor c'halon kendalc'h ivez,
Henvel eus eun tour tan en noz,
Birvidik Feiz hon tadou koz.

XI

Hor sikour, gant hor bugale,
War roudou Jezuz da vale.
Ra vo, en hon ty, mab Doue
Ar Mestr karet hag ar Roue !

XII

Pa zeuio Doue d'hor gervel
Ha pa vezimp var-nes mervel
Astenn da zorn madeleuz
D'hor bleina holl da dy Jezuz.

XIII

Da dy ar Zent hag an Elez
'Vit gwelet an traou a weles
Traou burzudus, traou hep o far
A ro Doue d'an neb e gar.

XIV

Er baradoz da holl viken
En eur bedi en da gichen
Ni 'zavo uhel hor moueziou
Da veuli Doue an Aotrou.

KANTIK 'SANT FIAKR

I

Kanomp hirio a greiz kalon,
Kanomp sant Fiakr hor patron
Daoulinet dirag e skeudenn
Lavaromp dezan hor pedenn.

DISKAN

*Meulomp a greiz kalon
Sant Fiakr hor patron.*

II

Roue ar Skos Eujen pevar
'Oa tad Fiakr, bugel dispar,
Gant læz e vam, mab ar roue
A zenas karantez Doue.

III

Gant e c'hoarig vian Sira,
Devot d'an Intron Varia,
Kentelliou Konan eskop Sor
A vagas o spered digor.

IV

Fur ha direbech e pep giz
Leun a c'hened, a yaouankiz
Dilezel' rejont evit mat
Bro o c'havell, palez o zad.

V

Treuzi a rejont ar mor bras,
Douar Bro-C'hall o c'hemeras ;
Ha digouezet e traonienn Mô
Sant Faron a gavjont eno.

VI

An eskop mat 'reas d'ar zant,
Eur digemer laouen ha drant,
Prim e savas e lochennig
Ha d'ar Werc'hez eur chapelig.

VII

An dremenidi, ar beorien
'Zo e wella amezeien
'Vit o zikour hag o maga
E labour start, heb ehana.

VIII

Pedenn, labour ha pinijen,
Setu e vuhez penn-da-benn ;
Bemdez, bep noz, dre bedennou
E labouras 'vit an nenvou.

IX

Leun a virit, dreist an oabl glas,
Eun deiz e ene a nijas ;
Hirio, eurus er baradoz,
Ra skuillo warnomp e vennoz.

X

Ama 'n Arvor Kerne-Izel
En deus eur gêrig, eur chapell ;
Koant eo goude kaout tri c'hant vloaz ;
Triagiz enni her ped c'hoaz.

XI

Eur feunteunig zo sko enni :
Gant feiz evomp dour anezi,
Pa zav a zindan an aoter
E red warni gwad hor Zalver.

XII

Evit m'hon do digemer vat
E paleziou Doue an Tad,
Sant Fiakr, pedit evidomp,
Gant kalz fizians ho saludomp.

XIII

Hag e liors ar baradoz
A hed an devez bras hep noz
Gant levenez ha gant dudi
Ni a'gendalc'ho d'ho meuli.

KANTIK KRISTENIEN DA VIKEN

DISKAN

*D'Hor Mamm Zantez Anna,
D'an Itron Varia,
D'Hor Zalver benniget
Ni vo fidet bepred.*

1. Hor c'halon baour mantret
Gant glac'har hag enkrez,
Ni a zo daoulinet
Dirazoc'h-c'houi, Gwerc'hez.
2. Kurun hag avel foll
Warnomp 'zo dirollet,
Hor bro 'zo vont da goll,
Truez, Mamm benniget !
3. Lezenn Doue gwechall
A rene kaer ar vro ;
Hirio lezenn tud fall
He stlej eun d'ar maro.
4. 'Vel eur vandenn chas mut,
Gant kounnar, noz ha deiz,
Emaint etouez an dud
O klask mouga ar feiz.
5. Ni 'zo gwir gristenien,
'Krouadurien Doue,
Savet en e lezenn,
En e zoujans ive.
6. Ni a zo kristenien
Prenet gant gwad Jezuz,
Maget dre c'hourc'hemenn
Gant e gorf presius.

7. Kristenien, hor baniel
A zo kroaz Hor Zalver,
Ni her sao soun, uhel,
Bemdez, e peb amzer.
8. Eur brezel kriz meurbet
'Zo grêt d'hor bugale.
Ah ! n'o dilezit ket,
C'houi 'zo o Mamm ive.
9. Ar falla kenteliou
'Zo dirazo laket,
Koll a raint o'eneou
E skol an drouk-spered.
10. Petra daly gouiziegez,
Ma kollomp hon ene ?
Ar skiant, ar furnez
A deu d'eomp eus an Ne.
11. Gwechall hon tadou koz.
Brudet 'vit o furnez,
'Glaske ar Baradoz
Arok pep gouiziegez.
12. Skianchou n'int netra
Pa 'z eont enep Doue ;
Ni fell d'eomp dreist pep tra
Savetei hon ene.
13. Gwerc'hez, Hor Mamm zantel,
Roit sikour hep dale ;
E plegou ho mantell,
Kuzit hor bugale.
14. E pevar c'horn ar vro,
Neuze, ni holl, Gwerc'hez,
Betek eur hor maro
Ni a gano bemdez.

KANTIK KATHOLIK HA BREIZAD

DISKAN

*Gwerc'hez sakr, Mamm garet Breiz-Izel,
Dalc'hit stard ar feiz koz (e kreiz) ar Vretouned ;
Selaouit eus an nenv hor youadenn zantel : } bis.
Katholik ha Breizad bepret !*

Eus ar garreg eun dour burzudus
A red, a red heb ehana ;
Ho feunteun eo, Mamm dous va Jezuz,
Ha c'houi 'lavar : It da eva !

Var hon daoulin ha goude pedi,
Ni a evo, a evo c'hoaz,
Enn hor c'haloun fizians e Mari,
Enn hor c'herc'hen chapeled bras.

Ma tiskennit var gern ar reier,
N'eo ket gant kelou ar maro ;
Ma c'houlennit chapel ha kleier,
N'eo ket da zini glaz hor bro.

C'houi a zigoras ann eienenn,
Mes c'houi a c'houlen dour ive,
Daelou a geuz, dour a binijenn,
Da vouga kurunou Doue.

Bezit laouen, rak hep dalea
Ar Frans é kaon he deus sentet.
Pet den e Lourd 'zo bet o lenva...
Pénaoz eta e vemp kollet ?

KANTIK MARTOLODED LECHIAGAT

*Brasa mignoned hor Zalver,
Sant Yann, Sant Andre ha Sant Per,
En eur vagiq o pesketa,
A ranke gounit o bara.* } bis.

Evelloc'h-c'houi, Ebestel bras,
Ni 'ya bemdez war ar mor glas ;
Hor bagig paour 've gwall gaset,
Ha burzud eo na vez kollet.

Etrezomp-ni hag ar maro
N'eus nemet eur plankenn tano :
Piou 'zo eta ouz hon diwall
En tarziou gwenn, en noz ténval ?

C'houi da genta, Salver Jezuz,
Dreist peb hini trugarezus ;
C'houi 'c'hourdrouzas mor hag avel :
Avel ha mor 'rankas tevel.

Ra zeui hon teod da zizec'ha
Ma n'ho meulomp, Gwerc'hez ar Joa !
Ho chapelig 'zo war an aod :
Karit a rit ar martolod.

Santez Anna, hed hor buhez,
Bezit hor mamm, hor patronez ;
Diouz ar c'herreg hag ar pec'hed
Diwallit ho martoloded.

Otrou Sant Jakes benniget,
A-viskoaz aman enoret,
Sikourit war ar mor dalc'hmat
Pesketourien Lechiagat.

KANTIK INTRON VARIA AR MOR

DISKAN

*Gwerc'hez, Rouanez an Arvor,
Roit ho pennoz d'an dud a vor ;
Pedit, pedit ho mab Jezuz
Da veza ouzomp truezus.*

Hor micher-ni a zo henvel
Ouz micher goz an Ebestel :
Eveldo ni a rank poania
War vor da c'hounit hor bara.

Dibabet 'n eus eur gwall labour :
Nag a zanjeriou war an dour !
Met gant ar Werc'hez benniget
En danger e vimp diwallet.

Pa vimp taolet ha distaolet
Dre nerz an avel dirollet,
Beilhit warnomp, o Mamm dener,
Hon diwallit diouz ar reier.

Goulenn a reomp ive, Gwerc'hez,
Ma teui da vat ar beskerez,
Ma c'hellimp, diwar hon labour,
Digas d'hon tud eun tamm sikour.

'Vit plijout d'ho kalon a vamm,
Ni a vo bugale divlam ;
En hon touez grit ne vo mui
Na labour sul na mesventi.

Bemdez e larimp hor pedenn,
Bep sul e kevimp 'n oferenn,
Ha morse ne jomimp re bell
Hep tostât ouz an daol zantel.

Pa zeui hon devez diweza,
Ni ho ped, Intron Varia,
Deuit da sturia hon eneou
Betek porz eurus an nenvou.

(J. B.)

**KANTIK MARTOLODED LECHIAGAT
DA ZANTEZ ANNA**

DISKAN

*Da vartoloded Lechiagat
Roit ho pennoz, Santez Anna,
War hor bagou parit ho tagad
Ma zeuimp d'ar porz da zouara (bis).*

Gwechall hon tud, gant levez,ez,
'Vit mamm goz ho tigemeras,
Ha daveto, gant karantez,
Mamm goz Jezuz, c'houi a zeuas.

War o lerc'h, ni, o bugale,
Warzu ennoc'h 'gas hor pedenn ;
Eveldo ni ho kar ive
E kreiz ar joa hag an anken.

D'ar bugelig en e gavell
Ha d'e vamm ouz e luskellat
Roit hepref sikour ha skoazell
Evit ma vint kristenien vat.

Pa ranko mont hor c'hrenn-botred
Da heul o zad war ar mor don,
Diouz ar skouer fall hag ar pec'hed
C'houi ouio diwall o c'halon.

D'eoc'h e ouestlomp hor bugale,
D'eoc'h hon tud yaouank ken nierzus,
D'eoc'h hon tud koz, war hent ar be,
D'eoc'h hor c'halon, Mamm goz Jezuz.

Pa zeuio Doue d'hor gervel
Dre vouez ar c'hloc'h d'an ofisou,
Evel gwechall an Ebestel,
Ni 'losko bag ha rouejou.

En hor bagou ni 'zaoulino
Mintin ha noz 'vit ho pedi ;
Digant Jezuz, en hoc'h hano,
Ni hon do boued da dud hon ti.

Diouz hor bagou ni 'bellaio
Kouls ha diouz hon tiegeziou
Ar skridou a zoug ar maro
Hag ar poezon en hon eneou.

En desped d'ar pezh a laro
An dud dizakr d'hon touella,
D'hor feiz hepref ni a zalc'ho
Gant ho sikour, Santez Anna.

Chomit e Breiz da batronez,
Mari ho merc'h da Rouanez,
Jezuz da Vestr en hor bagou
Ha muioc'h c'hoaz 'n hor c'halonou.

TOLENN

Dalc'homp d'hor feiz	1
Kantik Sant Riagat	2
— Sant Jakez	4
— Sant Eiakr	6
— Kristenien da viken	9
— Katholik ha Breizad	11
— Martoloded Lechiagat	12
— Intron Varia ar Mor	13
— Martoloded Lechiagat da Zantez Anna	14

IMPRIMATUR :

P. JONCOUR, *Vikel Vras.*

16 a viz Kerzu 1937.